

Au fol<sup>o</sup> 83 recto, seulement le titre :

(83 recto)

Intanvez Tonquedec

---

[rien aux fol<sup>es</sup> 83 verso et 84 recto.]

(84 verso)

Intanvez Tonkedek.

---

Nag eun intanvez a Tonkedek,  
 Zo neve maro he friet  
 A ia er blo man da Klasq he boued  
 E lec'h ma na vo Ket anaveet.

E tal dor he Otrio pa e erruet  
 Nag eun tam bara e deus goulennet  
 — En an' Doue, Otrio, eun tam bara,  
 Na meus me bed tam an de ma.

En an' Doue, Otrio, eun tam bara  
 Pe gant an naon e fatigan  
 A tri bugel paour a meus ive  
 A varv gant an naon Ker Kouls a me.

— Ma na cheus te tri a vugale  
 Ke d'ar ger a laz unan a ne  
 Ke d'ar ger a laz unan a dri  
 Da rei d'an daou all da dibri.

(85 verso)

An intanvez paour a c'ha d'ar ger,  
 Mantriet he c'halon a goler.  
 — Diganech, gverchez, e c'houlennan  
 Pe me o lac'h pe me ne gran?

Dre ma tostae dimeus e zi,

Ne kleve siwas nemet ar gri :  
 — En an' Doue mam eur tam bara  
 Prest omp gant an naon da fatiga!

A pelec'h e roffen me dec'h bara,  
 Pa nen deus draillen en ti ma?  
 A pelec'h e roffen me dec'h bara?  
 Me gomer eur gontel d'o lac'ha!

Eur bugel vian a voa en ti  
 En oad a zaou vis pe a dri ...

.....  
 .....

— En an' Doue, mam, nor lazit Ked,  
 Ni a iel om zri da glask om boued,  
 Ni a iel om zri da glask om boued  
 E lec'h na ne vim Ked anaveet.

(86 verso)

An intañvez paour ia de vele  
 Siwas eb rei tam de bugale.  
 Pa voa en he gwele moredet  
 he ell mad en ti zo entreet

— Nos vad a joa bars en ti man,  
 An intañvez pelec'h e man?  
 — Pieu zo aman d'ar pœnt man noz  
 Pa eo ed an oll dud da repos?

— Me e intañvez, ho hell mad,  
 A zo deud a beurs Doue on tad,  
 Da lavarat d'ac'h a beurs Doue  
 Rei bara do bugale.

Da lavarat d'ac'h intañvez  
 Rei do bugale bara aliez.  
 — A belec'h roffen me de bara?  
 Pa nen deus draillen en ti ma?

(87 verso)

— Segal o poa adet dec'h ar beure

Hag a vo daro e ben ar c'hres de  
 Kid d'ar park a lakit en droc'ha  
 Kassin-t-en (1) d'ar vilin da vala

Goude ma vo dec'hu malet,  
 Nag it tu d'an ti forn de boazet  
 Kassin-t'an e lec'h ma vo mui a tud  
 Evid ma vo goelet ar burzud.

Kassit eun tam d'oc'h Otrio a nean  
 Deus ar Segal neve ar bloa man;  
 Na ne Kassit Ked nemeur dean,  
 Erit ar pel en deus da vevan.

(88 verso)

— Dibid, Otrio, eun tam bara  
 Deus ar segal neve deus ar bloa.  
 — Dibid dime ma marc'h inkane  
 Ma c'hin da c'houde ar wirione.

Kri vije ar c'halon na welche  
 Tal Kloued ar park neb a vije  
 Goelet an douar digoret,  
 An Otrio hag he varc'h lonket,

Goelet an douar digoret  
 An Otrio hag he varc'h lonket  
 Na voa c'hommet var an douar  
 Nemed pen an aneval brutal.

}

[pas de trad. française.  
 rien aux 85 - 88 rectos.]

(1). — D'abord : en ; e corrigé en a : e..

